

Foré de Chateaulin
12 mars 1945

449

SONIOU BREIZ IZEL

Muziket

Gant e

Vab

Ifik VIHAN



Savet a Kanet

gant a barz

Kastellad

Ifik MOAL

Goulennit soniou Pabor KASTEL



Gant IFIK soniou brao Breiz

Yac'h d'an ene dizrouk d'ar feiz.

LIZER AN DEN KARET

Ton : *War bordik an dour*

I

Selaout holl ia va mignonet
 Potret yaouank hag ive merc'hed
 Klevit lizer an den karet
 Zo pell bras diouz Breiz Izel
 Tri wloaz a zo eo bet paket
 Paket er brezel.

II

Va mamm ennorc'h me sonj bemdez
 Pedi 'ran Doue gant trugarez
 Va zad va mamm o mab bihan
 Da c'hedal m'a teuio en dro
 Pedit pedit ta evintan
 Doue o selaouo.

III

Va breur a te va c'hoar vihan
 Bezit euruz a bezit kountant
 Met labourit a greiz kalon
 An donar ar parkeier
 A labourit ia evit' hon
 Paour-keaz prisonier.



IV

A te va greg va mestrez gared
 Sonj mad ia sonj mad en da vried
 Kas a ran dit a greiz kalon
 Er pokik start a seder
 Pokat rin c'hoas dit va mignon
 Pa zistroin d'ar ger.

V

A c'houi va bugale vihan
 Sentit sentit ia diouz o mamm
 'Peuz c'hoant dint ober plijadur
 Atao peuz klevet lavaret.
 E ranker beza beza fur
 Ia va mignonet.

VI

A breman araok echui
 E lavarin da bep hini
 Goude ia goude ar brezel
 Pa vo echu an tourmant
 Me zistroio da Vreiz Izel
 Va c'halon kountant.



WAR BORDIK AR GANOL

1

Er zulvez oant e pourmen
 War bordik ar ganol.

2

Me gwelet er baysantez
 Em c'hichen o oela.

3

A me goulen diganti
 Perak o oelit tu.

4

Va montr arc'hant emmezi
 En dour a zo kozet.

5

A petra rofez dimme
 Me ielo d'e zapa.

6

Dek lur kik morc'h ma karit
 A pemzek lur amann.

7

'Vit ar genta ploujaden
 Er pesk am euz gwelet.

8

'Vit an eil ploujaden
 Ar montr am euz touchet.

9

'Vit an trede ploujaden
 Ar montr am euz paket.

10

A me mont gant janedik
 Da glask va rekompans.

11

A sevel war va «velo»
 Gant kig a gant amann.

12

Paket gant ar archerien
 'Vit ober marché noir.

13

Kant lur gontravation
 A pevar miz prison.

14

Evelse ta c'houi potret
 Pa veloc'h o oela.

15

Memez braoa plac'h yaouank
 Sec'hit e daou lagat.

16

Gwelloc'h eo gwelet daelou
 'Get mont d'ar prisoniou.

O ia gant plijadur
 Plijadur em oa.

KLANV GANT AR C'HOANT DIMEZI

Ton : *Les fraises et les framboises...*

I
Me am euz c'houezek vloaz
A lavare Jani
Me garfe kaout er gwaz
Unan da zimezi.

DISKAN

A neuze me a gano
Vive la noce et le friko !
N' em o soursi gant netra
Nemet dansal a kana.

II
Pa vezint dimezet
Rankin mui labourat
Me vo en eurustet
Ma kavant er gwaz mad.

III
Hag evit kaout hennez
Me a reio ardou
Gant seiz a dantelez
Ma pako en aoutrou.

IV
Eiz dervez goudeze
En distro z' ar pardon
E kavas en ene
Vit prena e c'halon.

V

Janig a ioa presset
Kerken ar goulenou
E ti kear ez oa bed
E skiva 'n' embannou.

VI
Deac'h oa bed ar friko
A c'hleier d'oa sonnet
Met hirio en distro
An traou a vez torret.

VII

Heman zo en den brao
Nemet eo ruz e fri
Sec'het en d'euz atao
Met e kav eau-de-vie.

VIII
Oh lavare Jani
Ma mije bet gwezet
C'hoant em oa dimezi
Breman me zo paket.

IX

Me a rank mont en dro
Labourat deiz a noz
Gwelloc'h vit va friko
V'en bet plac'h yaouank goz.

X

A c'houi merc'hed yaouank
Jomit ket da goza
Klaskit er potrik koant
Met gwedit ugen wloas.

EIL DISKAN

A breman me rank redet
Va gwas zo en dirollet
Me ne m'euz nemet tourmant
Dimezet ount re yaouank.

Son ar Boessoner

Ton : *Ja kan ta labousik.*

I
Selaouit mat ta tudou
Son ar boessoner
Rak zeuz kals familiou
Zo 'velse er ger.

II
Da lun me vez mezo
N'e labourant ket
Eva ran kalz Pernod
Eb gwenneg e bet.

III
D'ar meurz me a vez klanv
Diez vez labourat
Va fenn a vez re skanv
Me rank kaout gwin mad.

IV
Ar merc'her vez erruet
Me vez klanv atao
Gwenneg m'euz gounezet
Eva ran atao.

V
Neuze c'herru ar iaou
Koumansan staga
Mez er ger va zudou
N'o deuz tamm bara.

VI
Va gwreg vez d'ar gwener
E c'haluzenna
E ti ar boulanger
E vez o (china).

VII
Ar zadorn zo tremenet
Echu an dervez
Hirio m'euz labourer
'Vit paya va glev.

VIII
Er ger pa erruant
Klevant o oula
Va greg va re vihan
O c'houlen bara.

IX
Ia son ar boessoner
Zo ar wrionez
E dud vez er vizer
E pad o buez.

X
Lezit ta ar boesson
En ostalleri
Kreincht war ar poezon
Evit en o ti

XI
Pa po c'hoant er banne
Kemerit er ger
Ei loukadik kafe
Pe er banne bier

XII
N'a vezit biken mezo
A c'houi vo euruz
Lezit ta ar Pernod
Ive ar gwin ruz.

XIII
Evelse ta merc'hedigou
Araok dimezi
Klaskit mat an aoutrou
N'gar ket eau-de-vie.

